

# Kantik Sant Vaude

Diskan



17. Pa glask ar serpent milliget  
Hor guall flemma dre ar pec'hed,  
Mirout outhan, O Sant Vaude,  
Da roi ar maro d'hon ene.

18. Pa zeuas ar Zant da vervel,  
E oa he ene ken santel,  
Ken brao guisket gant vertuïou  
Ma savas var eün d'an Envou.

19. O Sant Vaude, pa vimp, d'hon trô,  
Skoët eun de gant ar maro,  
Grit ma hellimp, gant ho skoazel,  
Kaout ive eur maro santel.

20. D'ho chapel, gant devosion,  
Omp deut, da zevez ho pardon,  
Da henori ho relegou,  
Ha da veuli ho vertuïou.

Imprimatur :

Quimper, le 4 juin 1903

F. CORRIGOU Vic. Gén.

Pedomp, gant fei ha karante,  
Pedomp an Aotrou Sant Vaude,  
Ma hellimp, gantan kennerzet,  
Var he roudou bepred kerzet.

} Bis

1. Sant Vaude breman ken brudet  
E bro Irland a oa ganet.  
He gerent, tud a renk huel,  
A oa ouzpenn kerent santel.

} Bis

2. He gerent, sklerijennet mad  
E kenver deveriou ho stad,  
A boanie, guelle ma c'hellent,  
Da gas ho dek bugel da Zent.

} Bis

3. O Sant Vaude, dre ho pedenn,  
Sikourit ar gerent kristen  
Da zevel mad ho bugale,  
D'ho zevel e doujans Doue.

} Bis

4. En he vam-vro, 'n eur manac'h-ti,  
Sant Vaude 'reas he studi;  
Eno 'gavas deskadurez,  
Ha guelloc'h c'hoaz : guir zantelez.

} Bis

5. He holl amzer, he yaouankiz,  
E chomas divlamm e pep giz;  
D'he vignoned, da dud he oad, } Bis  
Ato e roë skueriou mat.
6. Ra vñ yaouankiz Breiz-Izel  
Ouz Sant Vaude ato henvel,  
O tiwall ato aketuz } Bis  
Euz an holl bec'hejou mezuz.
7. Dioc'htu 'n he vro, eur veich belek,  
E poagn da goëz ha da brezek;  
Eno avad ne chom ket pell : } Bis  
Doue hen galv da Vreiz-Izel.
8. Daoust pegen poaniuz e kave  
Kuitât an holl dud a gare,  
Setu ar Zant treuzi ar mor, } Bis  
Ha dont var eñ varzu Arvor.
9. E Breiz-Izel pa zigoueas,  
Du-ma du-hont e prezegas,  
Hag aliez dre vurzudou } Bis  
E oue kresket nerz he gomzou.
10. E kement lec'h ma prezege,  
Kalz tud d'he glevet a rede.  
Gant pebez fei, pebez respet } Bis  
Gant hon tadou oa silaouet !
11. O Sant karet, grit domp ive  
Silaou ervad komzou Doue,  
Hag ato heuilha penn da benn  
Kenteliou mat hor beleien.
12. Beva 'reas pellik amzer  
'N eur barrez tost da Landreger;  
Da bedi, d'ober pinijen,  
Hen doa choazet eun enezen.
13. Ni evel doc'h, O Sant Vaude,  
A boanio da bedi bemde;  
Ni zalc'ho mad da lezennou  
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
14. Daoust ma veve 'n eul lec'h distro,  
Eur bobl-tud vize var he dro,  
Lod e zeue da glask yec'hed,  
Lod all skueriou ar barfeted.
15. Sant Vaude, dre ho pedennou,  
Deut d'hor zikour en hor poaniou,  
Goulennit domp digant Doue  
Yec'hed ar c'horf hag an ene.
16. 'N eur zigoueout en enezen,  
E kavas enghi a vanden  
Prenved donjeruz, pe aëred :  
He bedenn 'reas d'e tec'het.